




# ALANIK AL LOUARN

REFRAIN.

Presto.



**DISKAN.** — Bec'h d'Alanik  
Tân d'ar peiller;  
Bec'h d'Alanik  
Tân d'ar muntrer !

2. — An heol 'elen,  
A dren mene,  
A strink, laouen,  
Trezege an Env.

3. — Ar e'hlizen, drant,  
He deuz skuillet  
Boulou arc'hant  
Var an havrek.

4. — Sao, goustadik,  
Ouz da vole,  
Lez Margodik  
Kreis e huvre.

5. — Prim var dā skoa  
Da fuzuil vad,  
Arok, brena,  
Var zu ar c'hood.

6. — Flambô ! tono !  
Goaskomp, potret,  
Alan fino  
Zo diskampet.

7. — 'Vel eul lapous,  
'Vel eur vouled,  
A loenik rouz.  
A red a red.

8. — 'Dreuz ar girzier,  
'Dreuz al lannou  
Alanik laer  
A ra troiou.

9. — E jiipaden  
Stank ha raouillet  
Hed an draonien  
A gorn bepred.

10. — Mez ar c'hanfard  
Hen deuz juiet  
Ar guden, stard,  
Ha 'n em laeret.

11. — Pan! Pan! daou denn!  
O reuz garo!  
Var an dachen  
E ruill maro.

12. — Ar chas, kerkent,  
Peur-gounnaret,  
A daoliou dent  
Deuz hen brevet.